

Kemenadenn evit ar mediaoù

Goude ma ne c'hoarvezh tra ebet e kinnig kevredigezhioù difenn an endro o zekred dezho evit gwareziñ ar girzhier.

Evit lakaat da dalvezout lezenn stur n°2025-268 ar 24 a viz Meurzh 2025 a-zivout an emrenerezh boued hag adnevezadur ar remziadoù labourerien-douar e raktreser ouzhpennañ e-barzh kod an endro ur gwikefre evit gwareziñ d'un doare padus ar girzhier. En abeg da se emañ o sturiant ar Prefedoù-departamant ul labour evit unvaniñ ar prosesadurioù melestradurel implijet a-zivout distruj ar girzhier. Krouet e vo ur statud unvan evit ar girzhier da gentañ.

Embannet e oa bet da gentañ penn e vije lakaet an dekred da dalvezout d'an 30 a viz Meurzh 2026 met divizet e oa bet da ampellañ d'ar 1añ a viz Gouere 2026. Goude ma 'z eus bet moaien (*d'ar poent diwezhañ*) d'an holl re a labour war ar girzhier reiñ o soñj ha rannañ o skiant prenet gant Renerezh-Departamant an Tiriadoù hag ar Mor, ne vo ket lakaet da dalvezout an dekred d'an deiziad raktreset.

Abalamour da gement-mañ ez eus bet divizet gant Frañs Natur Endro (FNE) Breizh embann he dekred dezhi. En destenn-mañ e kaver kinnigoù kevredigezhioù difenn an natur evit ma vo gwarezet gwelloc'h ar girzhier hag ar c'hleuzioù.

« P'emeur holl o c'houzañv gant treuzfeurmadur an hin, ha pa vefe dija gant ar volz tommgor a zo a-us d'ar vro en deizioù-mañ, eo erru poent reiñ he flas d'an natur. Ar c'hleuzioù hag ar girzhier a sikour da vont en dro yac'h an endro, da virout an dour, da stourm a-enep ar riskloù a zourioù-beuz ha da gaout kondisionoù bevañ mat evit an holl. Poent bras eo gwareziñ anezho » eme Claude Lefebvre, ezel al luskad FNE Breizh.

Ar faolsdekred-se, peurvat hervezomp, a gaver aze dindan. Gant ma vo lakaet da dalvezout ar buanañ ar gwellañ !

[Pellgargañ \(pdf\)](#)

[Décr'Haie n° \[2026-0701\] ar 1añ a viz Gouere 2026](#)

[A-zivout ur strategiezh broadel](#)

[Evit merañ d'un doare padus ar girzhier](#)

Darempredoù gant ar mediaoù :

Marie-Hélène Philippe - 06 86 87 03 39

Luc Guihard - 06 07 16 54 81